

# DISPUT

COMPOSET A NEVEZ

ETRE



UL LEONARD HAC UR C'HERNEVOT.

**S**ELAOUIT hac e cléfot, hac e cléfot cana  
Un Disput so compozet a nevez er blos-mâ  
Zo grêt gant ur C'hernevot ha gant ul Leonard  
Ebars santier Tregueris o fumi ur c'horniad.

Nac er bloâves mil eiz cart ouspen sez ha trêgont,  
Eo bet savet an disput un nébeut divergont,  
Pepini a bretante difen caus e gontre :  
Deut d'o c'hîlevet o tisput an eil ouz eguile.

*Ar C'hernevot.*

Ar C'hernevot a c'houlen diouz ar pot a Leon :  
Livar din pes pansion a c'heus en da ganton ;  
Te na c'heus qet a grimpoez na galetz ivé :  
Me, va mignon, em beves an eil hac eguile.

*Al Leonard.*

Tao din demeus da grimpoez, da c'haletez ivé,  
Ne c'houlennan' nep fécon an eil nac eguile :  
Ro din un tam' qig eugen hac un tamic qig mioc'h  
Da zebri gant fars güiniz, a zo delicatoù h.

( 2 )

*Ar C'hernevot.*

Tao din diwar ben ar c'hig, se n'eo qet un dra vad;  
Parlant din demeus ar yod a gavân delicat:  
Ro din un tam yod silet hac eur banne lèz tro,  
Me lèzo ar c'hig eugen gant an neb a garo.

*Al Leonard.*

Trabissa res, va mignon, bremâñ da santimant;  
Evit paea da sermou e ranques caout arc'hant;  
En ezom deus a arc'hant e teuez d'o guerza,  
Ha ni, entrezomp, Leonis, a voar dont d'o laza.

*Ar C'hernevot.*

Credi a rân, va mignon, nac e mout e farçal;  
Peneverde ma teuez em brô da glasq segal,  
E viges bet perisset, rac ne poa qet a hed;  
Bloavezioù ar guernez, ni n'eus da recouret.

*Al Leonard.*

Ah! ah! eme'l Leonard, mad ec'h eus grêt toulla;  
Dont a vouie Qernevis e Leon da glasq bara.  
Peneverde Leonis, dre ma zint oll tud vrao  
• devije bet Qernevis assur mad var o fao.

*Ar C'hernevot.*

Un tamic out effrontet, Leonard, bragou-bras;  
Ma ve grêt dide prouvi, e vez nec'het, siouas!  
Lavaret ve Qernevis en da vrô o clasq boued;  
Ma ve grêt dit er zouten, meus aon na vez nec'het.

*Al Leonard.*

Hac e ranquen caout testou, memes deus da gontre,  
Hac e tefote cant din a so c'hoas en buc,  
Pore so bet soulaget ganemp-ni en hor brô,  
Hac a deugare Doue n'en dint qet oll mare.

*Ar C'hernevot.*

Credi a rân, va mignon, na c'heus sur tam résou;  
 Qerse gafe Qernevis rancout mont e Leon,  
 Goude heza bet maguet a grampocz, galetez,  
 Rancout monet e Leon da zebri patates.

*Al Leonard.*

Poan a res din em c'halon, o clêvet da gomzou;  
 Me meus guelet Qernevis na pa vijent em brô,  
 O sailla gant ar goachen goude sila ar yod  
 Gant ar c'hol ha patates, pa ellent, vel tud sot.

*Ar C'hernevot.*

Evit na col na panes na zeus qet em c'hontre;  
 Mes heza em eus irvin ha patates ive;  
 Traou int an excellanta evit ober souben,  
 Laqat assambles ganto un nebeudic trinchea.

*Al Leonard.*

Scuiza a rez ac'hanoù, poan a rez din em pen  
 Gant da irvin, patates, hac ive da drinchen :  
 Ar seurt-se a vez roet em brô d'ar chatal mud,  
 Nonpas da oza souben da bresanti d'an dud.

*Ar C'hernevot.*

Hansav din da legumach evit ober souben,  
 Pa rez fae var an irvin, patates ha trinchen ;  
 Rac evit ebars em brô ne zeus qen nemieto :  
 Noblanç ha paysantet, oll a zreb anezo.

*Al Leonard.*

Al lugumach em brô-me zo pour ha carotes,  
 Oignon, col-guen, col milan, ouspen hor bez rabes ;  
 Istre fao hor bez ive, col-fleur hac articho ;  
 Cetu eno'i lugumach a implijer em brô.

Consanti ran qementse na ganez , va mignon ;  
 Mes n'oar qet quer caer güisqet en escopti Leon  
 Evel ma zeo Qernevus gant o chupennou gloan  
 Hac o chupennou mezer a vez ganto dindan.

## Al Leonard.

Tao din , eme'l Leonard , gant da chupennou gloan  
 Ha da chupennou mezer a vez ganez dindan ,  
 Da vrageyer discaret ha da c'houricou ler :  
 Ni entrezomp , Leonis , a zoug oll en mezer .

## Ar C'hernevoù.

Güir mad e zeo qementse ganez-te , va mignon :  
 Mezer caer zo en Leon ; nies grët int difécon ;  
 Ispicial ar goazet a gavau divalo ,  
 Rac calz ané zo cazi collet en o bragou .

## Al Leonard.

Nac ar batret e Qerne o deus roqédennou  
 A so grët evel sier da zouguen sac'hadoù ;  
 O bragueyer zo formet a ziou pe deñr rideñ ,  
 O frennestou zo goañ vrás da chom liep stalafen .

## Ar C'hernevoù.

Nac ar merc'het a Leon o deus coeseyer bras ,  
 Na pa vezont-i fachet , a vez cruel o fac ;  
 Mes ar merc'het en Qerne o deus coeseyer bér ,  
 Tout int laquen a visach , tout o chaver ceder .

## Al Leonard.

Tao din a verc'het Qerne gant o choeseyer bér  
 A zo endro d'o bisach eguis un torchouer ;  
 Lostou o deus oe'h o c'hernou , eguis ar zaout em briñ ,  
 Vit en em zigueliena e servichont dezo .

*Ar C'hernevot.*

Ne allan mui contesti, cedi a ran ganez;  
 Ne qet possUBL resista eneb ar virionez.  
 Me a bao boutaillad eus a greis va c'halon  
 Evit en em unani ganez, pot a Leon.

*Al Leonard.*

Cetu ni camaradet, al Leonard ha me,  
 Ne vezoz den incredul demeus a guementse.  
 Un dra zo bet approuvet dirac calz eus a dud,  
 Ar rezon-mâ a finis etrezo an Disput.

*Al Leonard hac ar C'hernevot.*

Ar son-mâ so composet gant ur Breiziad farcer,  
 A hanavez tud Qerné, rè Leon ha Treguer :  
 Oll int lapinet subtil, nîgnonet a fécon,  
 Hac en peb amzer oll dign eus an titr a Vreton.

Hac en peoc'h hac en brezel o deus ar santimant  
 Eus a hotret courajus, dadius ha vaillant,  
 Ha mar be ret dê un deiz, neus fors eu pez tachien,  
 E vo cavet adare *Celtiget tor-e-ben.*

**AR C'HEMENER.**

Var ton : *Calz a amzer ameus collet.*

**E**UR C'hemener ne deo qet den,  
 Fardi bidao, oao, oao, oao, oao;  
 Eur Chemener ne deo qet den,  
 Nemet eur C'hemener hepqen.

Ne dle qet beza entêret,  
 Fardi bidao, oao, oao, oao, oao;  
 Ne dle qet beza entêret  
 Nac en ilis nac er vêret.

Hoguen e corn ur soulet qerc'h,  
 Fardi bidao, oao, oao, oao, oao,  
 Hoguen e corn ur soulet qerc'h,  
 Oll chass ar baros var e lerc'h.

Ha peb a gaz ha peb a gui,  
 Fardi bidao, oao, oao, oao, oao;  
 Ha peb a gaz ha peb a gui,  
 Peb a lunedou var o fri.

Ha peb a fleur en o guinaou,  
 Fardi bidao, oao, oao, oao, oao,  
 Ha peb a fleur en o guinaou  
 Da gana *Requiem* da vuntrer al laou.

Pa ha'r C'hemener d'an dançou,  
 Fardi bidao, oao, oao, oao, oao;  
 Pa ha ar C'hemener d'an dançou,  
 E carg e sac'h a vesqennou.

Evit ma laro ar merc'het coant,  
 Fardi bidao, oao, oao, oao, oao;  
 Evit ma laro ar merc'het coant :  
 Ar C'hemener en deus arc'hant.

Pa ha'r C'hemener da c'briat,  
 Fardi bidao, oao, oao, oao, oao;  
 Pa ha ar C'hemener da c'briat,  
 Ne ra nemet cana ha c'houtellat.

Nemet cana, cravat e ben,  
 Fardi bidao, oao, oao, oao, oao;  
 Nemet cana, cravat e ben,  
 Ha mauntra al laou lac ar c'hoem.

## CHANSON

VAR SUJET AL LABOURERIEN DOUAR.

**S**E LAOUIST oll, hac e clêfot eur guentel  
 A zo grêt a nevez var buez al Labourer ;  
 Un etat a zo poannius, n'o deus qet calz a repos,  
 Neb e gra gant paciantet a c'honit ar Barados.

Eul Labourer en em expos d'an amzer ,  
 Qercoulz d'ar yenien evel pa vez an domder ;  
 Pa vez erc'h, scorn, caserc'h, grizill, curun, glao hac avel,  
 Baleit, hac e qesot ato en e barq al Labourer.

Eul Labourer zo habillet e lien ,  
 Ne ve qet brao bemdez evel ma ve ar vrouc'hizien ;  
 E habit zo struillennec , gant an douar labeet ,  
 Calz a dud a renq e gaout , hac a granch ous e velet .

Differanç a zo etre cundu ar bourc'hizien  
 Hac an hini a ra lod demeus al labourerien :  
 Ar re-ze o deus qig ha pesqet , bara guen , souben vad  
 bepret ,  
 Hac eul Labourer , tamou yot , bara sec'h ha dour bervet .

Eul Labourer , baleet elec'h ma caro ,  
 A vez o qaquetet , calz a dud en disprizo ;  
 Gouscoude qement zo er bed , mar queront dont da zònja ;  
 Eo divar goust al labourer e ma ar bed oll e veva .

D'ar c'henta poent , e ranço eul labourer  
 Paea taill d'ar roue bep bloas un teir pe beder .  
 D'an eil , pa renço paea e vestr , ma na vez preste arc'hant ,  
 E vez o foar var e zanves : homàn eo an nec'hant !

D'an drede, e renq paea an deog d'ar person,  
 Evel ma zeo ar c'hustum, qementse a zo rezon,  
 Ha rei o c'hest d'ar veleyen, an aluzen d'ar beorien;  
 Hac evit na fazint qet, ar güir d'o servicherien.

D'ar bêvare, pa zemeer ar vugale,  
 E renquer o argouli, an danvez a izel neuze;  
 Ha mar he rust ar nibréti-caer, autronos gonde eureuji,  
 Ma na ve prest an argoulou, er pillint evel bleizi.

D'ar bempet poent, mar sonch dont da brocedi,  
 E renq caout eur yalc'had vad a arc'hant da zistribui:  
 Neus nac avocat na procuror, greffier, huissier na serjant  
 A rae an distera tol pluen evitan anes caout arc'hant.

D'ar c'houec'hvet poent, e renqo laqat evez  
 Da zioual eus an tan da gregui en e zanves;  
 Ennes a zo un element pa ve eur vech alumet,  
 A laqa calz da vont d'ar bas, ha menies da glasq o boued.

Ar seizvet eo al laeron gant o oll ardou,  
 A binç eul Labourer hac a fonill e c'hadellou;  
 Ha pa ell attrap ar yalc'h, netra gant'an na lezer;  
 Cetu penos goude e oll boan e za madou al Labourer.

Eul Labourer c'hoas a vez o caqetet,  
 Hac e zanves o vont, n'en deus guer da lavaret.  
 Endra ma e ma o conta e arc'hant, mignon a c'hoarzo  
 dezàn,  
 Ma c'ballent e guignat e raent, hac ober goab anezan.

Ar chanson-mà a ganer etrezoc'h, bretonet,  
 Var un êr excellant, a nevez eo composet,  
 Rac-se ta, me ho suppli da brena peb a gopi,  
 Evit e lenn ha passeal ho chagrin ha melconi.

FIN.

